



BREIZ HA LOURD !

— — — — —

Ni - ho sa - lud ste - re den vor Ni -
 - ho sa - lud ste - re den vor Sa - lud rou a nez
 ann ar vor O ma - ri ô mam
 be nigel E - breiz - yzel, ~~Ma~~ ho karet.

Tud ann aod, ha tud ar menez, (*bis*)
Evidoc'h o deuz karantez !

D'ann den a vor, d'al labourer (*bis*)
D'ar zoudard ez oc'h eur vamm ger !

A bell amzer, o Mam Doue, (*bis*)
Ni a zo bet ho pugale.

Dirag Itron santez Anna (*bis*)
Ni vez aliez o Taoulina !

Dirag ar bed holl, Mamm zantel, (*bis*)
Ni a zao huel ho panniel !

Tridal a ra hor c'halonou (*bis*)
Ann douar-ma 'zalc'h ho roudou.

Aman e roc'h Massabiel (*bis*)
Oc'h diskennet, Itron zantel.

Da ziscleria da Vernadet (*bis*)
Ez oc'h Guerc'hez dinam crouet !

O roc'h santel, roc'h dudiuz (*bis*)
Ho kuelelet hon rent evuruz.

Porz ar baradoz 'zo digor (*bis*)
Ennoc'h evit tud ann Arvor !

Aman 'c'h euz digoret Guerc'hez, (*bis*)
Eur guir feunteun a garantez !

Gant ann dour-ze hoc'h euz skuillet, (*bis*)
Dre ar bed holl, grasou brudet.

Ann dud klanv 'zo bet pareet (*bis*)
Hag ann dud dall ho deuz guelec.

Ann dud bouzar ho deuz klevet (*bis*)
Ar bec'herien zo distroet.

Mari, selaouit hor peden'n (*bis*)
Ni zo deuet ama ha vanden'n !

A bell ni a zo deuet holl. (*bis*)
Rag hor bro baour-zo 'vont da goll.

Klevet a reomp trouz ar mor bras (*bis*)
Spountuz evel koummou ar Raz.

Kurun a groz azioc'h hor pen'n (*bis*)
Hor c'halon zo leun a anken.

Enn amzer goz, c'hui oar, Guerc'hez (*bis*)
Bro c'hall oa ho rouantelez !

Jesus varnomp he zorn 'astenn, (*bis*)
A c'houlenn keuz ha pinijenn !

Morgousket e kreiz ann arne, (*bis*)
Ne glevomp mui ar virione !

Ann tarzou mor, nag ar gurun (*bis*)
Nann, netra na c'hell hon dihun !


Goulennit ouz kalon Jesus, (*bis*)
Evidomp eur zell truezus !

Roit ho pennoz d'hor c'herent ker (*bis*)
D'hor mignounnet choumet er ger !

O Guerc'hez, kendalc'hit ar Feiz (*bis*)
E kalon ann holl dud e Breiz !

Ha neuze, echu hor buez (*bis*)
Ni a gano gant ann Elez !

Gloar da Vari, Enor, bennoz (*bis*)
Ni ho kuelo er Baradoz !



PERMIS D'IMPRIMER

Quimper, le 11 août 1879.

J. JÉGOU,

VIC. GÉN.